

KANTIK SANTEZ BARBA

Patronez ar vengleuerien

Ton : *Mari hor mamm garantezus.*

DISKAN :

*Ma fatronez, santez Barba,
Ken mad 'vidon bete vrema,
O, me ho ped, ma diouallit
Dreist oll deuz ar maro subit.*

1

Me zo eur paour kez mengleuier
Tenn ha danjeruz ma micher :
Ma fatronez, en han Doue,
Beillit dalc'hmad var ma bue.

2

Pa ziskennan don ar vengleuz,
Ma ran, siouaz ! eur gammed treuz,
Setu me sklapet var ma fenn.
Euz ma buë toret an neuden.

3

Ar pezh am laka da grenn
N'e ket an dour o tivera :
Kalz danjerusoc'h eo ar vein
A c'hourdrouz kuez a var ma c'hein.

4

Beillit varnon, Patronez ker,
Ma diouallit e peb danjer :
Pellaït falc'h ar maro treitour
Epad ma c'houk pe ma labour.

5

D'am zro, herio, santez Barba,
Me a ra doc'h eur bromessa :
Hed ma buë 'fell d'jin tec'het
Euz ar vesventi milliget

6

Var ar pemde me labour
Ha da zul me a ehano :
En ofern e pedin Doue
Da gaout truec' ouz ma ene.

7


Bep mintin, arog ma devez,
Ma fater 'larin gant evez ;
Ha pa vo poent mon da repoz.
'Larin ma feden euz an noz.

8

Grit ma vevin e guir gristen,
Ma karin Doue da viken,
Ha ma vin ato diouallet
Hed ma buë diouz peb pec'hed.

9

Ha pa vo tost heur ar maro.
Gant ho sikour me resevo
Ma zakramanchou divea
Da vont d'an env da ziskuiñ.



Gouel ar zantez a zigouez d'ar bevar a vis Kerzu. Eun dra gaer eo guelel ar vengleuerien en ofern, da vouel santez Barba. Kalz kaeroch e ve c'hoaz, ma karfent, pe en devez-se, pe d'ar sul tosta, mont da gommunia en henor d'ho fatronez.